

# SON AR GLUJARIG

War eun ton okitaniat.

Eost 1932.

1

D'ar c'henta a viz Mae }  
Na petra rei d'am dousig ? } 2 wech.

DISKAN

Eur glujarig koantik  
O vont, o tont er c'hoadig  
Eur glujarig koantik  
O nijal kreiz ar c'hoad.

2

D'an eilvet a viz Mae }  
Na petra rei d'am dousig ? } 2 wech.

DISKAN

Diou goulmig wenn.  
... Eur glujarig koantik  
O vont, o tont er c'hoadig  
Eur glujarig koantik  
O nijal kreiz ar c'hoad.

3

D'an trede a viz Mae }  
Na petra rei d'am dousig ? } 2 wech.

DISKAN

Tri c'honikl rouz  
Diou goulmig wenn,  
Eur glujarig koantik  
O vont, o tont er c'hoadig... h. a.

4

D'ar pevar a viz Mae }  
Na petra rei d'am dousig ? } 2 wech.

DISKAN

Pevar ran eus poull ar raned,  
Tri c'honikl rouz,  
Diou goulmig wenn.  
Eur glujarig koantik  
O vont, o tont er c'hoadig... h. a.

5

D'ar pempet a viz Mae }  
Na petra rei d'am dousig ? } 2 wech.

DISKAN

Pemp oan bihan nevez-c'hanet,  
Pevar ran eus poull ar raned,  
Tri c'honikl rouz,  
Diou goulmig wenn.  
Eur glujarig koantik  
O vont, o tont er c'hoadig... h. a.

6

D'ar c'houec'hvet a viz Mae }  
Na petra rei d'am dousig ? } 2 wech.

DISKAN

C'houec'h labousig en eur gaoued  
Pemp oan bihan nevez c'hanet  
Pevar ran eus poull ar raned,  
Tri c'honikl rouz,  
Diou goulmig wenn.  
Eur glujarig koantik  
O vont, on tont er c'hoadig... h. a.

7

D'ar seizvet a viz Mae }  
Na petra rei d'am dousig ? } 2 wech.

DISKAN

Seiz pok d'ezi, deiz hon eured.  
C'houec'h labousig en eur gaoued  
Pemp oan bihan nevez-c'hanet  
Pevar ran eus poull ar raned  
Tri c'honikl rouz  
Diou goulmig wenn  
Eur glujarig koantik  
O vont, o tont er c'hoadig  
Eur glujarig koantik  
O nijal 'kreiz ar c'hoad.

KERLANN.